



PHOTO JOS LE DOARÉ

Kroaziou Breiz-Izel
e Bleun-Brug Sant-Tegonneg

BLEUN-BRUG

Niv. 113 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

GWENGOLO 1958

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur koum. a enor — 1.000 lur koum. madoberour) da :

**Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.
C. C. P. 1541.90 Nantes.**

Kas ar skridoù da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).
Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho
skodenn da :

**V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist
C. C. P. 544.22 Nantes**

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Plijadur ha displiadur, gand L. B.	1
Bleun-Brug Leon e Sant-Tegonneg, gand Job Seite	2
Kenstrivadegou Bleun-Brug Sant-Tegonneg	6
Bleun-Brug Noal-Pondi, gand E. Burgeot	8
Kentrivadeg ar skriva e Bleun-Brug 1958 (pennadoug bugale) ..	10
Kontadenn Bizai, gand Mab an Dig	11
Eur susit dihortoz, gand Yeun ar Gow	15
Salm 22, troet e brezoneg gand Mab an Dig	17

Deut eo er-mêz niverenn 7 « Les Cahiers du Bleun-Brug ».
Ar houmanant da « Bleun-Brug » ne dalv ket evid reseo « Les
Cahiers du Bleun-Brug ». Evid o haoud, skriva da : Jean Cor-
merais, Professeur au Lycée de Garçons, Rennes. C.C.P. 77.60
Rennes.

Koumanant-bloaz : 200 lur.



133862

Plijadur ha displiadur

Goude eur miz Mezeven, trouilhag a-walh, oam eet, e miz Gouere,
evel beb bloaz, gand levezeg leiz or halon, hunvreou kaer leun or
spered, o weloud an hañv braz o tispaka, ar parkadoug ed o vereni, e
kreiz glazvez ha c'houez vad or mêziou.

Edom, a zonzje deom, o vond da dremen deiziou laouen, da zaouri
goueliou dispar, da zestum eun eost puilh : frouez eur bloaveziad labour
ha poan.

Eet oam, en hent, leun a fizians ennom on unan, o kredi ne helle
netra stourm ouzom... Ha padal, a zo bet troet e melkoni, on hunvreou
kaer, freuzet, ha dispennet ; Nijet int kuit, teuzet gand ar glao hag an
amzer fall, dirollet warnom, epad sizunvezioù a-bez.

Peadra da zigas da zonzj deom, m'on oa henn ankounac'heet, e
chom ar bed-mañ, en desped d'an oll draou souezus, ijinet gand an dud
desket, eun dachenn a vrezel hag eun draonienn a hwervoni...

An neb pïou bennag e-neus kemeret perz e anken al labourerien
douar, dirag o zachennoug ed gwastalet, dirag o eost o vond da goll, am
hompreno.

Siwaz, rouez a-walh eo an dud, a labour gand o spered, hag a gom-
prenfe poaniou ar re a labour gand nerz o divreh evid diframma maga-
durez mab-den euz kalon an douar...

Kosa hini 'zo war an douar, n'e-neus ket a zonzj euz eun hañvez
paourh !

Da beleh-ta, va Doue, eo nijet an amzer euruz-se, a gomz anezañ
ar re goz, hag e veze ken tomm ha ken brao, e miz Eost, ma ne veze
ket a ezomm, emezo, da skuba al leuriou, diouz an abardaez... ?

Heb mar ebed, gwechall, ez eus bet ive meur a vloavez, hag eo bet
diaez ober an eost.

Med, e kichen bremañ, n'oa ket da gonta !

Tro on-eus d'en em zoñjal petra an diaoul a zo penn abeg ma z'eo
a-vremañ ken distreset an traou !

Lod a lavar eo an elektrisite, lod all, ar bombezennoug foll, a vez
strinket, a-dreuz an oabl, hag a laka ar houmoul da vond e breskin...
E hell beza gwir !

Marteze ive eo Doue, ar Mestr braz, skuiz o weled an dud, e vugale,
oh ober fae war e lezennoug, o klask gouarn ar bed, hervez o 'faltazi,
a deu da lezel an traou krouet da zeski dezo n'int ket hoaz ar vistri...

Anaoudeg euz ar stad reuzeudig, ma rankom gounid ennañ or bara,
an Iliz, a-hed ar wech, kenteliet gand an Aviel, ne ehan da lavared deom
kaoud fizians e providans Doue, ha pedi... Greet he deus pedennoug
goztez, ar Rogasionoug, evid goulenñ bennoz an neñv, skoazell an Oul-
Zent... « Pedi, d'ober petra, eme an dud, n'êr ket avansetoh... Ni a or-
ro micher, ni on eus mekanikoug... » Hag e-leh lakaad o 'fizians e Doue
e lakant o 'fizians en o gouiziegez hag en o 'fournez o-unan

Paourkêz tud !

Ma teufent, da vihana, goude beza desket ken alïez a skiant prena,
da weled sklêr, da vuzula gwelloh pegen dister eo o galloud, pegen br-
ezomm o deus, da lakaad diouz o hostez, an Hini hepken a hell rei, da
bep mare euz ar bloaz, ar glao hag ar zehor, an avel hag an heol.

L. B.

Bleun-Brug Leon e Sant-Tegonneg

19 - 20 a viz Gouere

Bleun-Brug ar Halvariou n'helle dibab leh all ebed evit e oueliou, er bloaz-mañ, nemed Sant Tegonneg eveljust. Amañ, e-neus kavet kement a helle gortoz : eun iliz disheñvel, skeud eun tour ken kaer all, eur halvar kizellet dispar, etouez eur bern touribellou ha kroaziou sebezuz, eur hlazvez etouez ar gwez, dirag maner Keleneg, a uz d'eun draonienn o korvigella ouz treid ar menez, tud a volentez vad da zikour evid renka peb tra.

D'ar zadorn da noz, e stlak dija banneliou ar Bleun-Brug, e peb korn euz ar vourh, e kren ar bokedou brug dirag prenecher an tiez, fichet en o haerra, e vranskell adreuz ar ruiou an erminigou, e vrall ar hleier, drant ha lirzin, da embann d'ar pevar avel eo digor goueliou Bleun-Brug Bro-Leon.

Da nav eur, e diabarz an iliz, strollad kanerien brudet Bro-Leon, euz Landi, dindan renerez an Aotr. Abjean, a ro da dañva d'eun ilizad mad a dud kantikou kaerra ha fromusa or bro. Noz a zudi, noz e bedenn ive, a zibrad ahanom diwar an douar, epad ma nij or spered war diouaskell ar han, warzu an neñv, da heul kantikou evel kantik ar Baradoz, Intron Santez Anna... epad ma kruz an ograou, dalhet gand an aotr Lanon, kure e Kleder. An aotrou n' Eskop, Visant Fave, a denn neuze eun neubeud kanteliou euz ar veillhadenn-ze, a zigor evidom an nor war eul lodenn euz an oll binvidigeziou a gaver c'hoaz e Breiz. Mennoz ar Bleun-Brug eo divenn Breiz en he 'fez, he ene da genta, he spered, he yez, kement a vefe dipituz ha pehed lezel da vond da goll.

Goude bennoz ar Zakramant, e kendalh c'hoaz ar hanaouennou da dregerni ganto an noz, med er-mêz, dirag dob-dal an iliz sklerijennet. Peb hini a gemer goudeze heni e lojeiz ha sur oun e voudinello er skouarn pell c'hoaz goudeze, kanaouennou dudiuz an-noz-se, dreist oll ar homzou diweza a zavas skañv ha nerzus warzu an neñv :

*« Ema Breiz o sevel, dre nerz he Bugale.
Ne fell ket deom mervel, divennou on ene.
War-zao, paotred Arvor ! Breudeur ha Mignoned !
War-zao ! Enor d'ar Vretoned. »*

An overenn-bréd.

Abréd diouz ar mintin, d'ar zul, e tihun St Tegonneg, e tiskenn bandennou bugale euz ar hirri dre dan, preset da gemered perz er hanstrivadegou, e tas-son ar vombard, ar biniou. An amzer a vo brao, daoust m'eo deuet da helei. An heol a gemer perz e joa an oll en eur en em zispaka ive d'e dro. Eun avel yah ha flour a vaz hag ar bannielou, ar garlanteziou a stlak a uz d'ar penn.

Da 11 eur, an iliz a zo leun bourr pa grog an overenn bred, kanet gand an aotr. chaloni Falc'hun, kelenner war ar yezou keltieg, e skol veur Roazon, hag aluzenner meur ar Bleun-Brug. Strolladou kanerien Landi, Plougerne, Kleder, Lokornan-Leon, St-Tegonneg, anavezet e bell-zo gand ar Bleun-Brug, a zo aze, er penn araog, ha d'o heul e krog ar bobl tud a zo en iliz da gana nerzuz ha kreñv, unanet oll er feiz. Tregerni ha krena a ra an iliz gand an agraou o fraonival dindan bizied an aotr Page. Goude an avel, an aotr. n' Eskop Fave, euz ar gador-zarmon, kaerra hini kizellet a gaver er béd, a zispleg, en eur brezoneg freaz ha nerzuz, mennoziou ar Bleun-Brug. Derhel ha divenn kousto pe ganto an oll binvidigeziou disheñvel fiziet ennom gand Doue, setu ar pezh a houlenn diganeom. Diskouez a ra deom penaoz Breiz a

hirio ha Breiz a wechall a die en em deuzi evid mond war raog atao, perag e tleont bale dourn a dourn evid ma splanno muioh c'hoaz dirag an oll dremm gwirion Breiz, he ene, he spered, he yez, an oll beadra m'om perhenn dezo, o-deus eun dalvoudegez hep par. Feiz ha Breiz e obet gér-stur ar Bleun-Brug, plijet gand Doue, eme an Aotrou 'n Eskop, e chomfent unanet da virviken.

Goude ar gredo, gand kantikou brezoneg, e tregern en iliz adarre. Epad ma sav warzug an neñv komzou dudiuz kantik ar baradoz d'on luskellad, e tosta ouz an daol zantel kalz a dud da gemered perz dre ar gomunion e sakrifiz santel an overn. A hleier a vrall en tour a nevez : an angelus a zav neuze, ledan ha nerzuz, a douez ar bobl tud ha n'int ket inouet en iliz, o kana meuleudi d'an Aotrou Doue.

Koroll, son ha kan.

Div eur hanter : al letonenn, dirag maner Keleneg, a zo goloet gand eur mor a dud. An abadenn a zo o vond da gregi. A douez ar gwez e tispak neuze, war a podiom, strolladou paotred ha merhed, diredet euz peb korn a Vreiz, ganto dilhajou he gwiskamañchou breizad, kaer ha pinvidig. An heol o c'hoari er gwez, perlez an dilhajou o lintra, diwesker an danserien o fringal skañv ha nerzuz, dirag peb taolenn e chom an dud sebezet, e strak an douarn heb ehan. Ar horoll, ar han a ya en-dro ; gand ar vombard, ar biniou e tregern ar hoad, an draonienn hag ar menez. Leoniz, Kerneviz, Tregeriz, Gwenediz a dremen war a podiom, peb rummad a zigas deom an tañva pe euz o hanaouennou, pe euz o dañsou. Tridal a ra ar halonou, en or hreiz, o selaou kanerien Landi, Plougerne, Kleder, Lokornan-Leon, ar Grouaneg. Evel tarziou kurun, e sav a-douez an dud ar strakadennou daouarn, pa dremen dirazom bagadou yaouan-kiz skol Landerne, Kombrid, Koad-Serho, dreist oll hini plahed yaouank an Oriant. Peb hini a zant ar gwad o virvi en e greiz pa glev son skiltruz ar vombard, ar biniou hag a lez e joa, e levenez da zével e peb doare. Kelhiou Loperhet, Baod, Plougastel, Plouedern, Plouye, Montroulez, Lokornan, a zo ken laouen o dañsou m'eo skañv o diwesker. Eun dudi eo klevoud, distagellet ker frêz, kanouennou Mari-Louise Uguen, euz Plouneour-Trez, an Aotr. Briz hag Intron Fer, euz Skrignag ha Kristiana Salaun, euz Lanarvily. Petra da lavared ouspenn ? n'ouzon ket ! rag diêz eo atao rei da dañva dre skrid kement a vez gwelet, kement a vez klevet. War blas e ranker beza ha seurt traou a vez santet hepken. Dirag seurt taolennou, dirag an dilhajou kaer o lintra-en heol, e lusk kanaouennou kaer Breiz-Izel, e sav foughe ha lorch e peb Breizad, e chom mut ha mantret an diavêzidi, e komprenner gwelloc'h avad pinvidigeziou dispar or bro. Ha ne rafe nemed kared muioh Breiz, digeri o daoulagad d'eur halz a Vretoned war ar pezh a zo dezo, a zo dija eun digoll da labour ar Bleun-Brug. Med ar Bleun-Brug a glask uhelloc'h ha setu perag, bremañ, e lask war zao, beb bloaz, eur hoariva-braz, greet dreist oll evid kentelia, ha sach a ene hag ar spered warzu traou a zigas da zoñj deom e Doue hag en neñv, en eur gemered ar gwenojennou, an henchou bet gwechall darempredet gand or zent hag on tud koz. En taol-mañ, eo ar halvariou mein, savet ha kizellet gand on tadou koz, eo a zervicho dezañ da jadenn, evid tostaad outo ha dreizo ouz Doue.

C'hoariva braz ar Halvariou.

Sant-Tegonneg hag ar parrezioù tro-war-dro a zo goloet a galvariou braz ha bian. E Sant-Tegonneg hepken, e kaver 34 anezo. Yann ar Barz, kellenner e skol an Aod e Gwiseni, gand skoazell, Visant ha Job Seïe, e-neus savet c'hoariva braz ar Halvariou. E 16 taolenn e tiskouez ennañ penaoz eo bet diwanet e Breiz, ar Groaz, ha penaoz eo deuet ar groaz-se, disterig da genta, da veza kalvariou braz.

An taolennou a zo bet c'hoariet gand ar parrezioù a dro war-dro, anezo, marteze, ouspenn 500 c'hoarier : St-Tegonneg, Plougastell, Pleiben, Brieg, Plovorn, Guiklan, Lok-Eginer, Pleiber, Plougerne, ar Grouaneg, Lanniliz, Brignogan Kleder, Lokournan-Leon, Landivizio, Peñez, Plouenan, Sizun, Ploudiri, Lok-Melar Lambaol, Kommana, Plounéour-Menez, Plouigno, Kastell-Paol, Taole, Henvig, Ploueskad, Konforz, Landrevarzeg, Skaer, Kombrid, Gwitevede, Gwikourvest, Gwikar, Bodiliz, an Dre-Nevez, Sant-Seo, Bodsorhel, Plougonven, Skrignag... kaerra kroazioù ha bannieloù an eskopti a gemeras perz er Hoariva-santel-ze, ar haerra hini bet roet gand ar Bleun-Brug, hervez Jos Doare euz Kastellin.

Evid digeri, tud yaouank ha bugale Plougastel, en-dro da vanniell o halvar, gand bannieloù Breiz o fichal a-uz d'o 'fenn, a dremen war ar podiom.

Warlerh e teu ar Mên-hir, arouez relijiel ar Gelted koz, gwechall, e-keid ha ma klever al lenner o tisplega :

« Ar Gelted koz, skuiz o vale deiz ha noz,
A jomas a-zav, eun devez, e kuz-heol ar béd koz,
Warlerh on tadou koz, tud dispart ha kalet evel dir,
E chom, aoterioù sebezuz, an daolven, ar Mên-hir. »

Drouized, goude, a zeu da vleunia ar Mên-hir-se ; war o lerh, meneh a zav warnañ eur groaz. Goude e weler o tremen skeudennou euz or hroazioù mein kosa : kroaz heb Krist, kroaz gand eur Hrist, kroazioù gand delvennoù, hag erfin patromou euz kalvarioù braz Plougastell ha Pleiben. (Gwimilio, siwaz ! a zo bet mired da zond, dre m'edo, en deiz-se, pardon ar barrez.) An daolenn-se a ziskouez ouspenn, daouzeg plahig e gwenn, ganto beb a vanniell warno anioù kaerra kalvarioù Breiz-Izel :

« Penceran, Lok-Melar, Sizun, Lambaol, Kilinenn, Sant-Veneg,
« Tronoan, Plougonven, Gwimilio, Pleiben, Plougastell, St-Tegonneg. »

Da heul kemend-all, al lenner a helle displega :

« E-tal ar vein hir, strewet ken stank war or mêzioù,
« On tud o-deus savet ar Groaz a-hed on henchou,
« O mennoz 'oa 'vel-se, santellaad douar Arvor,
« Diskouez d'o bugale, hent an Neñv atao digor. »

E-keid ha ma 'h en em zispleg an taolennou dirag daoulagad ar zelaouerien, ar hantikou ne baouezont da dregerni, kanet gand lazou kana Plougerne ha Landi, hag aliez diskanet gand an dachennad tud a-bez.

E-doug an eil lodenn, deg taolenn all a lakaio da vev, dre statuiou douget, ar pez a weler a gaerra hag a zebezusa, e kalvarioù braz Breiz-Izel.

Diou skeudenn zero, ar Werhez hag an el euz chapel Berven, douget gand merhed ha paotred e gwenn, ar hleier war vole, setu an Anjelus.

Sant Yann Vadezour euz Lok-Eginer a zeu goude, da zigeri hent d'Or Zalver.

Kraou ar Mabig Jezuz, euz Koadry e Skaer, gand e skeudennou koz, e koad koz-noe, eur mor a vugaligoù euz e heul, a zigor bues Or Zalver.

Da heul e vez gwelet ar familh zantel o tehed d'an Ejipt, war gein eun azenn deuet euz chapel an Treir e Plougastell.

Eun daolenn 'fromuz mar deus unan eo hini ar goan ziveza gant 13 paotr gwisket e gwenn euz laz-kana Sant Stanislas Lokournan-Leon, ha bagad Sant Joseph Landerne.

Ar Hrist skourjezet ha kurunet a spenn, euz Bodsorhel ha Pleiben, a dremen goude.

Kerkent, setu o sevel, a-dreg ar podiom, teir groaz ar Halvar, hini Or-Zalver brasoh eged an diou all, delwennou Intron-Varia'r Hlahar ha Sant Yann euz chapel Santez Berhed-Sant-Tegonned a beb tu dezi.

Tri el, gwisket e gwenn, a bign neuze a zindan divreh ar groaz, kalurioù aour en o daouarn dibradet uhel, da zastum ar gwad a ziver euz gouliou Jezuz.

Merhed, gand mantelloù kañv, an teir Vari euz o heul, a dremen neuze, goustadig-goustadig, dirag ar groaz, en eur zougenn war o diskoaz skeudenn Intron-Varia a druez, euz iliz Skrignag. Neuze e helled kana, e gwirionez :

« Piou 'lavar, pebez glahar
« He-devoe war Menez-Kalvar,
« Tenerra Mamm 'zo bet biskoaz,
« P'edo he Mab stag euz ar Groaz. »

An diweza taolenn, an hini gaerra, an hini a zigoro hent ar brosesion, a vo skeudenn ar Hrist gloriuz, ar Hrist o sevel euz ar béd, euz chapel Sant-Veneg e Brieg, a-dreñv dezañ, banniel ar Hrist-Roue euz Kommana, hag a beb tu hanter-kant kroaz alaouret hag arhantet, ar re gaerra a gaver e Breiz : Pleiber, Plouenan, Sant-Tegonneg, Lannedern, Konforz, Plouigno... Eur mor a groazioù gand o hleierigoù sklintin hag an heol laouen o c'hoari gand o 'ferlezennoù strink. Da gaerred c'hoaz an daolenn, e sav ive bannieloù koz ; bannieloù ar basion euz Pleiber, Sant-Tegonneg, Sizun, Lok-Melar, Ploudiri...

Dirag kemend-all, laz-kana Landivizio a hell lezel da dregerni, ar haerra « Alleluia » e-neus bet kanet biskoaz, e-keit ha ma trid kalonoù an oll. Gweled a heller neuze an daelou o redek war dioujodou ar re goz hag o hlever o lavared : « Biskoaz n'on-eus bet gwelet netra kaerroh ».

Kaerra prosesion a zo bet gwelet biskoaz.

Ha setu bremañ lohet ar brosesion evid mond beteg kalvar an iliz parrez. Ouspenn eun hanter leo he-deus da ober a-dreuz ar mêzioù. Tri galvar a gavo war he hent.

« Da heul soniri drant ar vombar, ar biniou,
« Da heul tonioù dispar or haerra kantikou,
« Ema en hent, prosesion vraz ar Halvarioù... »

Evel eur ster o korvigella dre eun hent treuz-didreuz, ar brosesion a gerz, sachet da heul bannieloù nao eskopti Breiz o ficha en avel, a-uz d'ar brug ruz ha d'al lann alaouret.

Dirag an iliz, war aoter ar halvar braz, e roer bennoz ar Zakramant : ar bennoz diweza, warlerh eun devez ken kaer.

Eur mor a dud a zo eno. Eur mor a groazioù hag a vannielloù a-uz dezo, kaerroh taolenn a zo diez da weled e nebleh ebed ! Tarza 'ra ar han evel ar gurun. Bennoz ar Hrist, Krist ar halvar a ziskenn war an oll, roet gand aotrou Person Kastell-Paol.

Evid kloza, an aotrou Chaloni Falc'hun a denn ar gentel ziweza : « Fouge ha lorh a hell beza e kement hini e-neus kemeret perz er gotel-mañ, unan euz ar Bleun-Brugou kaerra a zo bet biskoaz. Laouen e hell beza an aotrou Perrot, e barr an Neñv, dirag an eost a wél o sevel war hwezenn e dal hag e wad skuilhet. Plijet gand Doue e komprenfe an oll, muioh-mui, an deverioù o-deus e keñver « Feiz ha Breiz ».

« Da 'feiz on Tadou koz, ni paotred Breiz-Izel, ni 'zalho mad atao. » Evel eun tarz kurun, e sav ar hantik-se eur wech c'hoaz. Echu eo Bleun-Brug 1958.

« Ra gano peb kalon, karget a levenez,
« Da Zoue ha da Vreiz, on laouenedigez.
« Ar Bleun-Brug, dalhmad, a zivenno ene Breiz,
« He gizioù hag he yez, ha dreist peb tra he feiz. »

Job Seite.

G. S. — Savet ez eus bet eur film a liou (16 mm) war « Choariva ar Halvarioù » hag ar brosesion, evel ma'z eus bet savet eun all war Bleun-Brug Pont'n-Abad.

Kenstrivadegou Bleun-Brug Sant-Tegonneg

1958 a zo bet eur bloavezh frouezuz bras evid ar henstrivadegou skol. Ar gwella hini a zo bet biskoaz !

E-doug ar bloaz, teir vodadenn vistri, e Bro-Leon.

Ouspenn kant abadenn-prezegenn e skolioù Bro-Leon, ha Bro-Vigoudenn.

Tri Vleun-Brug skol e Bro-Leon e miz Mae :

Plougerne : 350 kenstriver — Kleder : 300 kenstriver — Lokournan-Leon : 250 (heb konta ar hanaouennou a strolladou hag an tresadennoù).

E peb hini euz ar gouelioù-se eun overenn gand kantikou brezoneg, hag eun abadenn vrezoneg penn-da-benn er patronaj, roet gand bugale hepkén.

D'an 22 a viz Even, *Bleun-Brug Pont'n-Abad* : 400 a vugale o kenstriva, euz 21 skol, 8 jury evid o barn, pevar gelenner e pep jury.

D'an 20 a viz Gouere, *Bleun-Brug Sant-Tegonneg* : ouspenn 400 a vugale o kenstriva, 11 jury euz o barn ; ar vugale a tond euz 39 skol. — 19 trollad a zo bet ouspenn, o kana.

Ouspenn 60 skol a zo bet laket loh enno er bloaz-mañ, er Finister hepkén, gand or henstrivadegou, ha tost da 1500 a vugale.

Koulz lavared an oll vugale o-deus bet bep a briz (levriou brezoneg Emgleo Breiz ha Tadou Kabusined Rosko). Tost da 2000 levr brezoneg ingalet e-touez ar vugale, hag a vo lennet aliez gand ar re vraz : eul labour frouezuz evid or yéz.

D'ar re genta ez eus bet roet traou all ouspenn al levr brezoneg (traou a dalvoud-gegez).

Evid kenderhel gand eur seurt labour, eo mall-mall dond war zikour Sekretour meur ar Bleun-Brug. Abaoe pell zo eo re vraz al labour evid unan hepkén.

Goulenn a reer ive, ha goulenn stard, ma vo enrollet ar re wella euz ar vugale, evid *Radio-Kimerh*. Abaoe pell-ze e prometer deom kemend-all. Abaoe pell-ze emaoim-ni o prometi ive kement-se d'or bugale. Bep bloaz avad e vez lezet ar glaour dezo da goueza en o genou. Daoust ha selaouet e vezim eun dro bennag ? — Petra 'zo c'hwekoh ha kalonekoh eged klevet bugale o tisplega hag o kana brezoneg ? Breman 'z eus milieroù a hellfe beza klevet. Ar vugale eo an amzer da zond. War an dachenn-ze eo labourad.

SKOLIOU BET O KENSTRIVA E PONT'N-ABAD

Paotred : Kombrid, Kerfeunteun, al Likès Kemper, Pont'n-Abad, Triagad, Plobannaleg, Pouldreuzig, Elliant.

Merhed : Kombrit, ar Gelveneg, Leskonil, Loktudi, Penmarh, Plogastell, Pont-e-Kroaz, Pont'n-Abad, Pouldergad, Pouldreuzig, Plovan, Elliant, Plozeved.

Lazou-kana : Skolachou al Likès, ha Sant-Youen Kemper, ha Sant-Loeiz Kastellin (240 kaner).

Strolladou kana : 18, euz Kombrid (p. ha m.), Leskonil (m.), Penmarh (m.) 3 trollad, Pont-e-Kroaz (m.), Pont'n-Abad (m. 3 str.) (p. 1 str.), Elliant (m. 4 str.), Kerfeunteun (p. 2 str.), Pouldreuzig (p.).

AR RE GENTA

1° KANA (A unanou).

Paotred : Christophe Kergourlay, Elliant ; Yves Lucas ha Jean-R. Guirot, Ker-

Merhed : Odette Le Cœur, Pouldreuzig ; Armelle Brusq, Pouldergad ; Alberte Feunteun ; Pierre Quéré, Pouldreuzig.

A STROLLADOU :

Paotred : re grenn : 1 Kombrit, 2 Pont'n-Abad, 3 Kerfeunteun.

re vraz : 1 Kerfeunteun.

Merhed : re vihan : 1 Pont'n-Abad hag Elliant.

re grenn : 1 Pont'n-Abad, 2 Leskonil, 3 Kombrit, 4 Plovan, 5 Elliant ha Penmarh.

re vraz : 1 Penmarh, 2 Pont-e-Kroaz, 3 Pont'n-Abad, 4 Elliant ha Plovan.

2° DISPLEGA.

Paotred : André Péron, Plobannaleg ; Daniel Le Roy, Kerfeunteun ; Guy Le Corre, Pont'n-Abad.

Merhed : Marie-J. Le Meur, Elliant ; Anne-M. Cadiou, Leskonil ; Alberte Griffon, Pouldergad.

3° LENN.

Merhed : Marie-L. Le Gouil, Pouldergat ; Armelle Brusq, Pouldergat ; Alberte Griffon, Pouldergat.

4° SKRIVA.

1. Sylviane Le Berre, Pouldergad ; 2. Lucienne Celton, Pouldergad.

5° TRESA.

Ghislaine Kerriou, Gelveneg ; Marie-André Marblez, Gelveneg ; Pierre Pétilon, Kerfeunteun ; Alice Andro, Pont'n-Abad.

KENSTRIVADEGOU POBL

KANA.

1. André Le Gouil, Pluguffan ; 2. Yves Guiriec, Pont'n-Abad ; 3. Intron Youinou, Douarnenez.

RIMADELLOU.

André Péron, Pont'n-Abad.

SKOLIOU BET O KENSTRIVA E SANT-TEGONNEG

Paotred : Milizag, Lanniliz, Lokournan-Leon, Plougerne, Plougoum, Plouvorn, Landivizio, Sant-Tegonneg, Kastell-Paol, Gwiseni, ar Grouaneg, Kléder, Plouenan.

Merhed : Plouvorn, Gwiseni, Ploueskad, Plounevez, Sant-Tegonneg, Dirinon, Kleder, Plougerne, Lesneven, Lokournan, Milizag, Ploumoger, Plougin, ar Grouaneg, Plouvien, Treglonou, Lanarvili, Lanniliz, Kerniliz, Gwikar, Bodiliz, Loperhed, Plougastell, Plougoum, Plouzané, Plabenneg.

STROLLADOU KANA.

Paotred : Plougerne (2 strollad), Ar Grouaneg, Lokournan.

Merhed : Gwiseni, Ploueskad, Dirinon, Kleder (3 str.), Plougerne (2 str.), Lokournan (3 str.), Plouvien, Treglonou, Lanarvili, Loperhed.

AR RE GENTA

1° KANA (a unanou).

Paotred : Herve Yven, Plouvorn ; Yvon Mingam, Sant-Tegonneg ; Bruno Cadec, Plougerne, François Bizien, Lokournan.

Merhed : Marie-P. Foricher, Plougerne ; Marie-Fr. Le Gall, Gwiseni ; Anne-M. Le Roy, Plougerne.

KANA A STROLLADOU.

Re vihan : 1. Treglonou (m.), 2. Plougerne (m.), 3. Plougerne (p.), 4. Kleder (m.).

Re grenn : 1. Grouaneg (p.), 2. Ploueskad (m.), 3. Kléder (m.), 4. Dirinon (m.), 5. Plougerne (m.), 6. Lokournan (m.).

Re vraz : 1. Gwiseni (m.), 2. Loperhed (m.), 3. Kléder (m.), 4. Lanarvili (m.), 5. Lokournan (m.), 6. Gwiseni (p.).

2° DISPLEGA.

Paotred : Jean-Y. Charerter, Treglonou ; Yves Abalea, Gwiseni ; Jean-Jacques Priser, Landivizio

Merhed : Monique Tanguy, Kerniliz ; Hélène Bourhis, Lopered ; Anne-Marie Le Roy, Plougerne.

3° LENN.

Paotred : François Argouarc'h, Gwikar ; Yves Pronost, Grouaneg ; Denis Kerouanton, Gwisakar.

Merhed : Lisette Herry, Gwikar ; Marie-L. Roue, Gwikar ; Marie-M. Maguer, Gwikar.

4° SKRIVA.

1. Denise Bourouillec, Gwinevez ; 2. Marcelle Ellegoet, Plabenneg ; 3. Germaine Corlosquet, Gwiseny ; Marie-Louise Larsonneur, Ploudaniel.

5° TRESA.

Anne Le Brun, Kastell-Paol ; Claire Le Brun, Kastell-Paol ; Marie-Jos. Fave, Kerniliz.

KENSTRIVADEGOU POBL

PREZEGEREZ.

1. Annaig Kabon, Lanniliz ; 2. Marsel ar Barz, Milizag.

KANA.

1. Loeiz ar Gall, Plougerne ; 2. Joseph Kervella, Ploudaniel ; 3. Jean Perran, Meslan ; 4. Pierre Paul, Lesneven.

Daou ha daou : 1. Dimezellet Klivier ha Bergot, Plougerne ; 2. Dimezellet Azou ha Lukas, Ploueskad-Plabenneg.

RIMADELLOU.

1. Per Paul, Lesneven ; Jean Perron, Meslan.

Bleun-Brug Noal - Pondi

13 a viz Gourhelen 1958

Deu vñe 'zo ne oé ket bet gouil erbed ged BLEUN BRUG BRO GWENED. — E Noal-Pondi, d'en 13 a viz gourhelen, éh es bet kroget éndro ged er lideu e vé groeit ken guerso eid inourein « Feiz ha Breiz ».

Rak, ardran taolenn skeduz gouilieu er Bleun-Brug, drest plijadur er skiendeu, é ma red klask er menoh, er spéred, er pal : mired ha lakad de greskein personeleh or Bro, hé emskiant. Breihiz e zo red dehé dihuenn madeu drest : ou Fé hag ou Yeh.

Eid dihuenn, red é boud dihun ha labourad. Labour éleih e zo eid derhel er brehoneg ér stad a yeh viñ. Raksé é teliehé boud pep tolpadenn Bleun-Brug « deueh er brehoneg biñ ».

Brehoneg biñ e zo bet, èl ma jaojé, é Noal-Pondi. Kevérereheu er mintin e zo bet guélet énné ré nebed a dud, siouah, drestol ré nebed a vugalé-skol ! Ha neoah, mar vennam é tigoro er skolieu d'er brehoneg, rekiz é de getan ma vo digoret er spereu dehon, ma veint sturiet tremazon, drestol ré er vugalé e zo « Breiz de zont » : erbad sonjal é sañu en est hé unan ma ne vé kei hadet éraok. Taolet e zo bet eueh penaoz lod kaer ag er vugalé ou des kañet, lénét ha displéget é Bleun-Brug Noal-Pondi, nen dint ket brehonegerion. Chetu labour talvouduz ha fréalzuz eroalh : dañe e zo éleih ol dré er vro, é Breiz-Ihuél kerkloz èl é Breiz-Izel...

De 11 eur, é oé lan iliz Noal ged en dud deit d'en overenn. Paotred ha merhed bagadeu ha kerlenneu a bep kornad, tud er barréz e oé tolpet én dro d'en E. Eskob Gwened, d'en E. Meur Baron, Vikél braz, d'en E. Falc'hun, Alézoñour braz er Bleun-Brug. Dirag en aotér é oé béléan, en E. Mér ha kuzulerion Noal.

Aviel er zul e zisplégas en E. Béleg Cadic, én ur brehoneg hueg ha éz de gompren. « Doh hé fréh e anatér er huéenn ». Huéenn Breiz e zo hoah yah : re zalho d'hé fé ha d'er madeu hé des reseñet diged Doué.

A hed en overenn é vezé kleñet kañenneu brehoneg ged deu strollad-kan : Noal ha Gwened-Trusag én dro d'en orglézeu, ha en iliziad abeh é reskond dehé. Kaer en des en ol anzañ ha lared n'est ket par d'or hañenneu, atao en ou dilaoskér muioh mui, aveid lakad én ou leh, Doué é unan e oui petra, ré liès... Hag a dural n'é ket rekiz, krédet mé, boud brehonegour eid kanein brehoneg a féson.

Arlerh er pred, en E. Cadic, kannad ha mér Noal-Pondi, e laras de rénerion er Bleun-Brug, — é brehoneg hag é galleg — pégen euruz e oé é ùled er gouil kaer-sé én é gornad-bro. Envorieu éleih e zisplég en E. Mér, ged kalz a hélavarded...

Mes dija é kleñer bombard ha binieu é lakad er vorh de zasson. Dam de ùled. Peb unan d'é dro, chetu é tribun er pempzeg strollad benag trema tachenn-sport « En deved gwenn ». Eno, ahed en anderù, é vo « Son, Koroll ha Kan ». Ré nebed a gan, siouah ! Ged plijadur éh es bet guélet é soñein ur bagad neñé : hanni merhed er C.E.P. ag en Oriant. Chetu hoah ur skuir vad de voud héliet é parrézieu aral, nag é vehé ér vro galleu...

Eid achiñ en deueh, en um lakas peb strollad de heul kroézieu ha bannieleu Breiz é ambroug er bréhésion ar en hent d'en iliz.

A hed en deueh, ged lavar on Tadeu,

« Kañet hon es a galon vad — En inour d'er Vro ha de Zoué »,

ur huéh hoah, kent um guitad, é kañamb dirag Sakremant en Aotér — revo mélet —. Hag en E. Falc'hun, a lein er gadoér-predeg e lar d'en ol « inour ha trugéré ».

E. Burgeot,

Bleun-Brug Noal - Pondi

13 a viz Gouhere 1958

Daou vloaz 'zo ne oa ket bet gouel ebed gand Bleun-Brug Bro-Wened. E Noal-Pondi, d'an 13 a viz Gouhere, ez eus bet kroget endro gand al lidou a vez greet abaoe ker pell-zo evid enori « Feiz ha Breiz ».

Rag, a-dreñv taolenn skeduz gouelioù ar Bleun-Brug, dreist plijadur ar skianchou, eo red klask ar menoz, ar spered, ar pal : mired ha lakaad da greski personelezh or Bro, he emskiant. Breiziz a zo red dezo divenn madou dreist : o Feiz hag o Yez.

Evid divenn, red eo beza dihun ha labourad. Labour e-leiz a zo evid derhel ar brezoneg er stad a yez veo. Rakse e tlefe beza peb bodadeg Bleun-Brug « devez ar brezoneg beo ».

Brezoneg beo a zo bet, evel ma tlie, e Noal-Pondi. Kenstrivadegoù ar mintin a zo bet gwelet enno re nebeud a dud, siwaz, dreist-oll re nebeud a vugale-skol ! Ha koulskoude, ma fell deom e tigorfe ar skolioù d'ar brezoneg, red eo da genta ma vo digoret ar sperejou dezañ, ma veint sturiet davetañ, dreist-oll re ar vugale a zo « Breiz da zond » : arabad soñjal e savo an eost he unan ma ne vez ket hadet araog. Taolet ez eus bet evez penaoz lod kaer euz ar vugale o-deus kanet, lennet ha displeget e brezoneg e Bleun-Brug Noal-Pondi n'int ket brezonegerien. Setu labour talvouduz ha frealzuz awalh : danvez a zo eleiz oll dre ar vro, e Breiz Uhel koulz hag e Breiz-Izel...

Da 11 eur, e oe leun iliz Noal-Pondi gand an dud deut d'an overenn. Paotred ha merhed bagadoù ha kelhioù a bep korn, tud ar barrez a oa bodet en dro d'an Ao. 'n Eskob Gwened, d'an Ao. Meur Baron, Vikel Vraz, d'an Ao. Falc'hun, Aluzenner braz ar Bleun-Brug. Dirag an aoter e oa beleien, an Ao. Mér ha kuzulierien Noal.

Aviel ar Zul a zisplegas an Ao. Beleg Cadic, en eur brezoneg c'hweg hag éz da gompren. « Diouz he frouez eh anavezet ar wezenn. » Gwezenn Breiz a zo c'hoaz yah : ra zalho d'he feiz ha d'ar madou he-deus resevet digand Doue.

A-hed an overenn e veze klevet kanennoù brezoneg gand daou strollad-kan : Noal ha Gwened-Trusag er dro d'an ograou, hag an ilizad a-bez o respont dezo. Kaer o deus an oll anzav ha lared n'eus ket par d'or hanaouennou, atao o dilaosker muioh-mui, evid lakaad en o leh, Doue e-unan a oar petra, ré aliez... Hag a-hend-all n'eo ket red, kredet ahanon, beza brezoneger evid kana brezoneg a feson.

War-lerh ar pred, an Ao. Cadic, kannad ha mér Noal-Pondi, a laras da renerien ar Bleun-Brug, — e brezoneg hag e galleg — pegen euruz e oa o weled ar gouel kaer-ze en e gorn-bro. Envorioù e-leiz a zispleg an Ao. Mér, gand kalz a helavarded...

Med dija e klevet bombard ha biniou o lakaad ar vourk da zasseni. Deom da weled. Peb unan d'e dro, setu e tribun ar pempzeg strollad bennag war-zu tachenn-sport « En deved gwenn ». Eno, a-hed an endervez e vo « Son, Koroll ha Kan ». Re nebeud a gan siwaz ! Gand plijadur ez eus bet gwelet o seni eur bagad nevez : hini merhed ar C.E.P. euz an Oriant. Setu c'hoaz eur skouer vad da veza heuliet e parrezioù all, nag e vefe er Vro-Hallo...

Evid echui an devez en em lakas peb strollad da heul kroazioù ha bannieloù Breiz oh ambroug ar brosesion war an hent d'an iliz.

A-hed an devez, gand lavar on tadou,

« Kanet on eus a galon vad, en enor d'ar Vro, da Zoue »

eur wech c'hoaz, kent 'n em guitaad, e kanom dirag Sakramant an Aoter — ra vo meulet. Hag an Ao. Falc'hun, euz lein ar gador-brezeg, a lar d'an oll « enor ha trugarez ».

Kenstrivadeg ar skriva e Bleun-Brug 1958

Eur veilhade

Sonet eiz eur gand orolaj ar gegin. Ar familh a-bez a zo er zal evid ar veilhade. Er-mêz an avel a c'hwez dre gorventenn, eur glao stard a dint war ar prenestou bihan. Pegen brao eo beza en ti kichenn eun tan mad, ar flammou uhel, ruz ha melen, a bign en eur zañsal 'barz ar chiminal du. Peb hini e-neus e blas. Tad en e 'fauteuil a lenn « Ouest-France ». Evezieg atao, mamm, tost d'al lamp, a zidoull chupenn Perig. Mamm-goz a ra stamm : eur re bazou loued da Zoazig. Tad-koz zo hanter-gousket war e gador-plouz. Soazig, studiuz meurhed, a zesk he hentel. War planch al leur-zi, Mikael a zav eun ti gand kubou koad livet glaz. Ivonig hi a ra eur hastell brao gand kartennou deuz he c'hoari. E korn an oaled, war al ludu klouar, Minet polotennet a rouzmouz doustadig, ha Turk, eur pikol ki braz, astennet dindan skabell mamm-goz, a zo kousket.

Pegen mad eo beza oll asamblet en eur zal domm, dirag an tan. Ma zoñj a ya beteg ar re a zo er-mêz, heb ti na tan, heb familh martreze. Paour-kêz tud, bezom mad evito pa zigouezo an okazion.

Sylviane LE BERRE (skol Pouldergad).

Ti braz Kerall a zo leun chek gand an amezeien deuet da ober beilhadog ar bloaz nevez, evel m'ema ar hiz er harter.

Er-mêz, e vez klevet an avel o sourral, hag a vare da vare, barrou glao ha kazarh o skei war gwer ar prenest. Eun nozvez teñval ha kriz !

Amañ e tiskuzer goude an derveziad labour. Beilhadeg hir, gand o'hoari domino. Peb hini en-deus lakaet kolo fresk en e voutou koad, ha torchou foenn warnezo : tomm eta d'an treid ha dizoursi ar baotred.

War an daol an dominoioù a strak : pevar c'hoarier a-zevri, daou o hedall tro, ha kalz re all o selled. Ar merhed a vez ive o veilha, oh ober stamm hag o konta marvailhou, okupet eun tammig gand ar re yaouank, eh esa gouzoud e peleh e vezo friko da genta er harter.

Nebeud a her a glever gand ar c'hoarierien beteg an dominoenn ziweza. Neuze avad e sav eur bern cholori :

« Perag an diaoul az-peüs dalhet da bar-bide ? »

« Ha te desker, te a diefe beza krouget da zoublenn evit rei din-me ar penn a hweh. »

Keuz diwarleñ ! Ha skiant-prenet ! Unan euz ar hounidelen a gemmesk an dominoioù, hag e stagor adarre gand kalz evez... Deg lur a vo da rei d'ar re a hounezo tri daol diouz reñk.

Pa vez klevet unneg eur o seni, Goulhen a lavar eo poent cheñch cheu, setu ma vez ramaset an dominoioù ha digaset an traou war an daol : bara, kig, amann, gwîn ha kafe. Peb hini a zelaou gand plijadur ar marvailhou, heb gweled ez a buan an amzer en-dro...

An amezeien a guita an ti en eur starda o bonedou war o 'fenn. Hag echuet ar veilhade en eur lavared : « Noz vad ! » an eil d'egile ha : « Kenavo disadorn ! »

Denise BOUROULLEC (skol Gwinevez-Lokrist).

Debret eo koan. Noz eo. An amezeien a zo deuet du-mañ. Eur frapad marvailhou a reont da genta.

War-dro deg eur, va mamm a daol keuneud en tan. Va zad a halv an dud da zond da hoari domino. Ni ar vugale a gan hag a hoari asamblez. An oll a zo euz e-barz an ti. Ar glao er-mêz a ra gwall drouz, an avel a zo kreñv, mez leskom anezo, ni zo er goudor.

Va hoar vihan e-kichenn va mamm a zo kousket dija ; va breur a zo o c'hoari hartou gand ar baotred all. Ar wazed hag ar merhed o-deus echuet ar bartiad domino. Va zad a lavar din : « Kan deom 'ta ! » hag am-eus kanet « War vordig an dour ». Plijadur o-deus bet o selaou ahanon. War-dro unneg eur va mamm a gas va hoar vihan d'he gwele.

Da houde ez eus eur banne kafe ha kouignou. Hag adarre an dominoioù hag ar hartou en-dro hag ar ganaouenn ive. Mez diwezad eo dija, pase hanternoz. An amezeien a lavar da va mamm :

« Poent eo mond d'ar gêr. »

« Ya. Dabard, gortozit eun tammig c'hoaz. »

Ar veilhaden a zo war an tremen. En taol-mañ an dud a guita an ti, en eur lavared :

« Kenavo, ha noz vad deoh ! »

« Ha deoh ive ! » eme ni.

Bremañ peb hini a zo eet da gousket. Ni a zo brao en or gwele en noz ken kaer, goude beza bet plijadur asamblez.

Marcelle ELLEGOET (skol Plabenneg).

Kontadenn Bizai

gand mab an dig

Pempved pennad : Pastekom, loan va zad

Karantez ar paour-kêz aotrou kure en em droas oll neuze a-err war-du an istrimant a gazeg, a jome euz eritaj e dad.

Morse n'em-eus gwelet em buhez eul loan hag a hellfe beza kemeret evid eur houzin a bell da Bastekom. A-veh ma chome en e zav... eur rampog... eur maltroun !... E eskern a ree bolosennou war e gein. Berr-weled ? Nann ! Hanter-zall ! Euz e hinou glapez e teue a-flao... eonenn... heñvel ouz lèz torgouilh. Ne oa na du, na gell ; liou ar hoh yêr a oa warnañ.

Ne vijen ket bet souezet o weled o tond war e lerh karrigell an Ankou.

Kezeg Sant-Pabu n'int ket spontig. Koulskoude, daou pe dri loan, kanfarted sounn o 'fenn, a zavas uhel o skouarnioù hag a zaoulammas dreist ar haecioù en eur vrammad, pa weljont Pastekom evid ar wech kent.

« Oa ! » emezo, « Hemañ zo savet euz Toull ar Gagnou ! » (1)

Bemdez, ha meur a dro bemdez, an aotrou kure a gase e gazeg d'ar parkeier, d'an tachennou na oant ket hoaz d'an ampoent laeret gand ar Houarnamant e douar ar Zent, evel ma lavared. Peuri ar Zent ne ree ket kalz a vad da Bastekom. Med en douarou diwar-dro ne deue labous ebet en oll : eur spontailh brini a hiz nevez a oa kavet e Sant-Pabu !

Ar filiped o-unan ne gredent ket tostaad da zastum ar greun na oant ket bet malet en e gornailhenn.

Treud gagn, evel eur paour-kêz gwidorh e chome Pastekom. Mez e weled !

Ha ne ouie ket gourrichal ! Eur farsite oa e gleved, eur strakell raoulet e toull e houzoug ! Ar zaout o-unan a c'hoarze leiz o hov e zelaou.

An aotrou kure, eñ, a oa lorch ennañ gand e gazeg.

« Sell 'ta, Fanch ! Sell 'ta, Job ! Sell 'ta, Bi ! Gweled a rez ? Loan va zad, paotr ! Na pebez loan ! Eul loan mad, sentuz, eul loan kreñv, loan va zad ! »

Ne yee morse war e gein : aon e-noa da skuiza Pastekom, hag ez ee gantañ evel Seza gand he garvig, krog en e gabestr.

Bloavezioù ha bloavezioù e padas an istor, beteg ma oe anvet perhenn loan, va zad da gure e Gwiseni. Pastekom a yeas war e lerh... d'ar pilpazig. Lod a lavar e lakajont eiz deiz d'ober o beaj ! Med me ne garan ket sevel kaozioù. Ar wirionez atao, aotrou kure ! Ne ouezan ket en oll petra deujont da veza o-daou da houde.

E-pad m'edont amañ avad eh en em gavas ganeom eun istor hag a dalvez ar fred he honta.

Eun deiz, an aotrou kure a grogas ennañ ar boan zent.

Na pebez poan, ar boan zent ! Ar penn en em lak da voudal... Ar gwazied, an nervernnoù a grog an tan enno... Hag aze war ar stammioù eur hoz tamm lustreugenn a gildant en em lak da zanka, da zanka, da leski er hig beo, da gregi evel eur hi, evel eun naer gand he flemm... da lammad, da zaoulammad, d'ho presa gand tachou hir, tachou dir, tachou hag a laka da drei gand imor, evel gwisou doun, doun, en ho chotou, en ho stammioù ! Krena... Youhal... Kregi... Chaokad... beteg mein ma hellfed... Ne ouezer mui petra d'ober, glebdour-teil o c'hwezi, o rodella hag o tirodella etre al liñserioù, ar pallennou. Han ! Ya ! eur gwall hoan, aotrou kure.

(1) Oa ! zo gêr tud Sant-Pabu. E Toull ar Gagnou e veze interet gwechall ar chatal maro.

Bremañ 'z eus louzeier evid ar boan zent koulz hag evid ar poaniou all. Hag e helloh mond buan da Vrest, pe zoken da Lokournan, da Witalmeze. Eun nadozig vihan lemm a ya, koulz lavared heh-unan, evel eur pig en douar gleb, beteg ar gwiriziu, d'o laza. Ar medisins-dent a hell, goude, labourad gand e durkez, e gontilli, e vorzolog... troha... drailha... ar pezh a garo, en ho kinou, evel ma raje d'eur banezenn! C'hwi a vouse'hoarzo!

Ha! Pegen brao e teu ar vuhez da veza! Gwechall, n'oa ket heñvel. Pa deue ar boan da waska re, e teued da gaoud ar marichal.

« Gwel 'ta, paotr. Pehini eo? »

An durkez vraz, ganti c'hwez treid ar hezeg, a groge en dant klañv, pe en hini e-kichen, yen-skilas, war ar stammiou o virvi! Ar marichal a lakee neuze penn e hlin war ho parlenn. Gand e zorn bleveg, ledan evel eur holvez, e ree a-benn-err eur voustradenn, eun dro. C'hwi a glaske youhal, pe a zemple, e-pad ma save en eur hoarzin ar marichal uhel en êr, d'hen diskouez d'an oll dud vak a zirede-beb tro ma tenned dent, evel ma teuent da di ar higer beb tro ma lazed leueou, ho kildant brein, stag outañ an hanter euz ho kinou!

Aotrou kure Sant-Pabu, êz deoh gouzoud, n'e-noa ket kalz a hoant da vond da weled ar marichal, hag a gavas gwelloc'h mond da Vrest da gaoud ar medisins.

Med pa vezer klañv, ne ouezer ket petra hell en em gaoud. Arabad mond an-unan da redege ken pell pa ne vezer ket war an tu. Dond a reas eta da va gweled, me, e gamalad.

« Bizañ emezañ, «dond a ri da Vrest ganin, warhoaz mintin?»

« Ma kirit, aotrou Kure. Kerkent ha pemp eur me a starno ar voetur. »

« Ya » eme ar hure, « med eun dra am-eus da lavared dit. Warhoaz e ranker starna Pastekom, loan va zad. »

(Va Doue! Biskoaz kemend-all! Starna Pastekom! Goude ma ve bet lavaret din mond d'ober tro an nimbod, ne vijen ket bet lakaet nehetoh!)

« Pastekom », eme goustadig, « e-neus ezomm c'hoaz da gemered nerz. N'eo ket plomm a-walh war e zivesker. Nag a grehiou a zo war hent Brest, aotrou kure! Ar hezeg ar hreñva, ar boazeta, o-deus trawalh d'ober. »

« Nann! Nann! Nann! » emezañ. « Loan va zad a zo ken gouest hag eun all. Ni a yelo warhoaz da Vrest gand Pastekom. »

Ez a-walh oa da lakaad el limon. Selled a ree a-dreuz, evel atao, hir e vusunou, evel ma lavarfe:

« Petra an diaoul ema ar re-mañ o vond d'ober din-me? Me ne ran ket a foutre! Gweled e vo! »

An aotrou kure a zañse evel eur gelienenn war e dro, e galon o tridal, e vouez ive:

« Loan va zad! Loan va zad! »

Ne vez ket kalz a dud war an henchou da bemp eur e Sant-Pabu! Amañ eo bet karet a viskoaz ar housk mintin!

Ez deoh gouzoud, n'em-oa komzet da nikun euz va hefridi.

Koulskoude, harp er presbital, eh en em gavas ganeom Fanch ar Houm, eur brichin a zen. Petra hoarie gantañ, da veza savet euz e wele, evid eur wech, ken abred-se? Digor e chomas eur pennad mad e hinou, en eur zelled ouzom on-daou, en eur gichenn er voetur, kaset euz eun tu degile gand stroñs an hent ha bale distrantell ol louaj.

Pa dremenjom en e gichenn, e tennas e voned, evel leun a zoujañs. Med me a zellas a-dreñv va hein. Fanch ar Houm, e kreiz an hent braz, troet war-du ennom, a reas sin ar groaz... a lopas war e feskennoù... hag a yeas e toull ar hae da dorta o c'hoarzin.

War an diskenn, ne yee ket re fall an traou... Med pa deuas ar hreh kenta, Pastekom a yeas berr war e alan. Ni a ziskennas. Dirag an tiez, avad, gand aon rag teodou an dud, ni a zavas en-dro er voetur.

« Alo! Alo! Pastekom! Pastekom! Alo! Diskouez ez out eur paotr gouest, loan va zad! »

Siwaz! Siwaz! Kaer oa d'ar paour-kêz kure komz kaer, al loan kêz ne helle ket mui mond a-raog, gand ar voetur houlo, e kreh Brezhenn. Ni a rankas on-daou bounta warni. Netra, dober! Gleb-teil o c'hwezi, dialanet, al loan kêz, a jome a-zav.

« Loan va zad! Paour-kêz loan va zad! » eme an aotrou kure.

An amzer a dremene. Tost oa da eiz eur, p'edom oh en em gaoud gand tiez kenta Plougin. N'on-oa ket greet diou leo!

« N'en em gavim ket hirio e Brest », eme. « Alo! Lezom Pastekom e Plougin. Ar person e-neus eul louaj lijer hag or haso bunan da Vrest. »

« A! Nann! » eme an aotrou kure. « Gand ar vez! Ne hellan ket goulenn e loan gand ar person, peogwir e oar a-walh em-eus unan. C'hoarzet e ve din en oll brespitaliou. »

« Mad, neuze e vo ranket gweled e leh all », eme.

Me a anaveze eun intañvez a werze frouez e Plougin hag he-doa eul loan-boetur euz an dibab. Ha dao da zisplega dezi ar gudenn.

« Me ne houlennan ket gwelloc'h », emezi, « eged rei, va loan, med diêz kenañ eo da ren. Ma roit dezañ an disterra taol fouet, pe ma lavarit dezañ an disterra ger a-dreuz, eh en em lak d'ober e benn fall ha n'eus mui netra d'ober gantañ. Ar pezh gwella a ve mond ganeoh va-unan d'ober eun dro da Vrest. »

An aotrou kure a skrobe e benn. Mond da Vrest, eur vaouez etrezom on-daou! Na pebez taolenn gaer! D'an deiz war-lerh edom e riskl da gaoud or poltred war an « Dépêche »! Nann, n'oa ket deread. Ar wreg a asantas chom er gêr, hag a roas deom he loan gell.

Ar paour-kêz Pastekom a oe lakaet en e leh ar hraou. Kerkent e hourvezas.

En taol-mañ, ne oe ket pell an abadenn. Gell or hasas d'an drot buan beteg Lambezelleg. Hag a-raog kreisteiz edom e ti ar medisins.

« It er zal vihan amañ da hedat. An aotrou a zo eet d'ober eun dro. Lavaret e-neus ne vije ket pell », eme deom ar plah.

Ha ni azeza war gadoriou bourret. An aotrou Kure a geemras e uriou, ha me va horn.

« N'em-eus mui tamm poan zent ebed », eme eñ din.

« Mad » eme, « bremañ eo greet ar stal. Goude eur seurt beaj e rankoh lezel amañ daou pe dri dammig askorn. Me ne deñin ket en-dro ganeoh er zizun a zeu. »

Hag e stagas adarre gand e bedennou.

« Paour-kêz loan va zad! Poseve e vo diskuizet a-benn emberr! »

« Ya », eme, « poseve! Ar hig ha fars a vo douetuz didanet p'en em gavim er gêr! »

Hag eñ adarre d'e uriou.

Me a voredas. Eñ ive douetuz braz. An amzer a dremenas. Edon gand va fempved korniad.

« An aotrou ne deu ket buan. Marteze eo eet da lakaad ober eun durkez nevez, ha n'edo ket ar marichal er hovel! N'oh ket inouet ouz e hedat? »

« Tra! Tra! Tamm ebed en oll! », eme an aotrou kure. N'em eus ket a vall d'e weled. »

« Mad! Me 'm-eus! Va bouzellou ema ganto ar zon-galv! Ped eur an diaoul e hell beza? Daoust ha n'om ket ankounac'haet amañ? Mond a dlefeh da weled. »

« Nann! Nann! Ne heller ket ober traou evel-se, e ti eun aotrou e Brest. »

« Aotrou pe zi-aotrou, me zo skuiz ouz e hedat! »

Ha me en em lakaad da strakal ha da durlonkad uhel.

Kerkent an nor a zigoras.

Ar plah, an daoulagad er-mêz euz he 'fenn, hé divreh en êr, digor braz he ginou :

« O ! Paour-kêz tudou », emezi, « me am-eus hoh ankounac'haet aze ! An aotrou a zo bet o tebri e lein. Bremañ eo eët da Landerne ha ne deuio ket en-dro a-raog warhoaz da noz. »

« N'oufed pe rafed ! » eme an aotrou kure. « Deom d'ar gêr ! »

Pare oa ha ne falvezas ket gantañ klask eur medisin all.

« D'ar gêr ! Hopala ! » emeve. « Me a zo du gand an naon. Er eun tu bennag, poseve, e vo kavet da zebri ! »

Med an ostaleriou d'an ampoent ne roent da zebri nemed da eur ar prejou, hag ar veleien ne yeent ket evel bremañ d'an tavaruiou. An aotrou kure a skrabas e benn adarre hag e teuas anezañ eur gavadenn.

« Me a anavez eur familh amañ e-kichen. Deom d'he gweled ! Med arabad lavared n'on-eus ket bet or merenn. N'eo ket deread, Bizai, en em gaoud ken diwezad da zebri e ti an aotrouien. »

« Beb a vannig kafe en eur hoz tamm skudellig bapa. Ar hrekennad a-bez a vije bet eet ganin ! Eun nebeud kouignou logod leiz ha loued ! Netra ken !

Ha dao en-dro er voetur ! Me a oa eun droug ennoun ken oan mouzet ! Ha ma ne zelaouen mui glabouserez an aotrou kure ! Me hel lezas da gemered ar sugellou. Taol diota va buhez !

« Eu 'ta, Gell », emezañ ouz o lakaad da strakal a-benn-err war gein al loan. Kerkent, kerkent, setu eñ t'er war e giz, hag a-raog ma 'm-be gellet, ober eur siseurt, edo diadrefn ar voetur e sklaseñ- wer eur vagajenn vraoikou ! An traou o strinka a beb tu... ar stern o terri... Gell e-unan d'an daoulammou da Blougin, ha ni on-daou va hure ha me, o ruilh er pri, leun wad, e-touez ar sklisennoù gwer, koad, braoikou a beb ment hag a hep liou... youh war or hein. hag heb dale etre daouarn an archerien.

✱

Da ger e teuas d'an aotrou kure e veaj e Brest. M'e-noa bet eun tammig arhant en eritaj, ouspenn e varmouz a gi hag e loan daonet, gwell a ze evitañ ! Dre hras Doue, den e Sant-Pabu ne ouezas an istor.

Pastekom avad... a hounezas e vrud.

N'ouzon ket penaoz e savas ar gaoz e oa bet e Brest, hag e teuas da veza evid ar hezeg all... evel eur mister.

« Ya », emezo d'o bouchou bihan. « It da weled ! Lavaret e vije eo maro an tri balevarz kenta anezañ ! It da fizioud ! Henez, paotr, zo bet e Brest. »

ECHU.



EUR SUSIT DIHORTOZ *

Beb mintin, pa zeue Per-Yann Boudouleg, ar hloareg braz d'e labour, e kave an aotrou Koadou, an noter, daoulinet e korn ar studi, war eur gador-iliz, hag o pedi kaloneg eur chapeled gantañ en e zaouarn. Eur zalud a ree dezañ gand e benn, heb distaga eur gomz, ha didrouz eh azeze da skriva ouz e daol.

Eun den santel ha devot meurbed e oa an aotrou Koadou, padal ne oa Per-Yann nemed eur paotr difeiz ha dizoue, eur gwir *republikan ruz*, evel ma veze lavaret neuze. Morse ne lakee e dreid en iliz, evid an interamañchoù zoken,, hag ar vrud en devoa da veza frañmason pe, da vihana, da gaoud darempred gand ar frañmsoned.

Daoust d'an disheñvededigez a oa etrezo war dachenn ar relijion e ree an noter hag e gloareg braz kalz stad an eil ouz egile. Ar hemm a oa etre o menoziou ne vire ket outo da veza mignoned ha prizet e oa Per-Yann gand e vestr o veza ma oa onest ha leal ha gouiziege kenañ war e vicher. A-hend-all e oa ken douget ar hloareg evid an aotrou Koadou ma vije bet en em daolet en tan, diouz red, evid e zavetei.

Hogen ne veze morse ano ebed ganto euz relijion na politikèrèz, gand aon d'en em feuka ha da lakaad tabut da zével etrezo.

Eur paotr yaouank koz a zaou-ugent vloaz pe war-dro e oa Per-Yann. Ha gand e voued e veze en-tu-all d'ar pont, e ti Yann an Ourgouilhous, ostiz d'an ampoent ha paotr a vil micher. Marteze o deus soñj c'hoaz, evel don, ar re euz va lennerien a zo eet war an oad, euz an ti-ze skrivet warnañ, e galleg hag e lizerennou braz, pozioù a vefe kavet souezuz hag iskiz hirio an deiz. A-uz d'an nor e oa lakeet : « Amañ e roer lojeiz war droad ha war varh. » Hag a beb tu da brenest an ostalidi, e helled lenn, war unan euz ar stalafioù : « Amañ e troher o bleo hag e tremper soubenn d'an dud », ha war eben, berrhig ar skrid : « Koad ha kig-sall da werza ».

Gwelloc'h e oa bet gand Per-Yann fermi eur gambr e kêr e leh goulenn unan digand an ostiz, kuit da rei da hemañ da houzoud piou a zeue d'e glask pe da gomz gantañ, rag gwall- droet e oa an Ourgouilhous d'en em emell ouz ar pez na zelle ket outañ. Dalhmad evid gwir, kerkent hag echu e zevez gand ar hloareg braz, e veze unan-bennag o tond da skei war zor e gambr, aotrouned euz ar gostezenn ruz peurlïesa, ran gand ar politikèrèz ha techet da zispenn ar veleien gwas ma hellent.

Bewech ma veze meneg euz eur votadeg bennag, e talhe tost ar re-mañ dezañ, muioc'h neuze eged biskoaz, dre an abeg ma ne oa ket par da Ber-Yann da skoazella an danvez kannaded, m'eriou pe guzulierien a zibabent da zougen banniel ar « gostezenn ». N'edont ket heb gouzoud e oa eñ eun den euz ar bobl, nag heb anavezoud ar veli e-nevoa war ar gouerien hag ar vicherourien o veza ma komze, diorbid hag heb mez, ar brezoneg, yez e genvroiz dister.

✱

Setu ma teuas, d'an ampoent, ar mare da zilenn kannaded da gas d'ar Gambr, hag an aotrouned ruz, bepred oh hisa Per-Yann, a ree o mad euz al levezon e-nevoa, e kêr ha war ar mêz, da gestal hag ive da brena mouezioù evid o hevezour.

Med eun deiz, daoust m'e-nevoa doare da veza yah-pesk, e oe sammet a-daol trumm ar hloareg braz gand an Ankou, a-greiz m'edo da vad o labourad evid danvez-kannad e gostezenn. Kerkent e oe gwelet ar barner-a-beoc'h hag a hrefter o tond da lakaad ar ziell war e arrebeuri. E dosta kar, eur hoar dezañ, dimezet e Pariz ha nemeti da susita dezañ, n'edo ket war al leh pa oa tremenet he breur ha, setu perag, e oa bet red lakaad ar ziell war e zanzev, evid heulia al lezenn.

(*) Susit = heritaj.

Nebeud goude, amzer dond d'ar vro dre an trêñ, e tigouezas e kêr ar zusi-tourez hag he 'fried. Beziat e oe ar horv-marô e bered ar barrez, goude beza tremenet dre an iliz, ar pezh a oe eur gwall-daol da baotred ar gostezenn ruz a grede dezo e vije bet douget d'an douar evel eur hi, heb kroaz, na beleg, na *Libera*.

Neuze e reas ar zusiourez hag he gwaz an difreou a oa red evid ma vije savet ar ziell ha greet an ivantôr, rag ne 'falveze ket ganto kemeroud perz er zusi heb gouzoud hag eñ e oa muioh a beadra eged a zle. Dond a reas, eta, da gambr an hini marô, ar barner-a-beoh, e hrefter hag an aotrou Koadou, an noter, mestr koz Per-Yann (Doue e bardono!).

Kerkent ha lamet ar ziell kuit, e oe furchet en arrebeuri ha kavet eur mell yalhad e-barz unan euz tiretennou an armel. Goulloet e oe war an daol hag ar peziou, o stirliñkat drant dre ma kouezent, a lugerne laouen ouz sklerijenn an heol o para warno. Kontet e oe an teñzor, anezañ tri mil loeiz a ugent lur.

Dirag eur seurt tra, e chomas sebezet ha sabatuget an oll. Biskoaz en o buhez n'o devoa gwelet eur bern arhant ken braz. Soñjit 'ta! tri-ugent mil lur en aour melen! Peadra da brena an tri pe bevar gwella tiegez a oa en tolead! Ken sebezet ha ken fromet e oa c'hoar ha breur-kaer an hini marô, ma krenent, gand al levenez, o soñjal e oant deuet euz a baour-raz da vondianed pinvidig-mor. Ha, gand souez hag eun tammig enkrez, e houlennent outo o-unan, penaoz e oa bet gouest Per-Yann da resta kement a zanvez pa ne houneze nemed eur houmanant a hanter-kant pe dri-ugent lur ar miz e studi an aotrou Koadou.

Ne oe ket, koulskoude, ken braz souezenn an aotrouned hag o hini, pa ziskoachjont euz an armel, a-zindan eun nebeud kreziou, traou iskiz dianav-kaer d'ar zusiourez hag d'he gwaz, hogen anavezet gand ar barner hag ar grefter evid beza, moarvad, perhenn o-unan da draou heñvel, ha gand an aotrou Koadou evid beza klevet komz anezo. Nikun, avad, euz an tri aotrou ne zistagas grik hag e chomjout dizeblant ha mud pa houlennas an daou bried petra a oa ar rikou-ze edont o paouez kavoud. Med, heb gouzout dare d'ar re all, e reas a-gorn ar grefter d'ar barner eun taolig lagad truilh hag helavar meurbed.

Bez' e oa euz an traouerez-se evel eun tapeled houarn-gwenn alaouret, aroueziou ha merkou digompren warnañ, da lakaad en-istribilh ouz ar houzoù dre eul lerennig hag eun tavañcher krohen pemoh, heñvel-mil ouz eur poch toer, treset warnañ eul lagad dindan eur skouer hag eun nebeud benviji mañsoner, evel eul loa-vañson, eur reolenn hag eur morzol beg lemm.

Eur baperenn e stumm eun doare-lizer, hanter-voulet ha peurleniet da houde gand ar bluenn, a oa ive, kaset d'ar Breur Karet Meurbet. Per-Yann Boudouleg, gand ar vreuriezh frañmason « Mignoned Sully », euz Brest, da houlenn sklerijenn diwar-benn eun den anvet Gregor Mazo, mestr-skol e Poullan, savet c'hoant gantañ da veza digemeret er gevredad...

Ne zeuas den da glask penn euz an tri mil pezh aour rag, war a gonter, e ren ar fiziañs etre ar Vreudeur ha n'ema ket ar hiz ganto da houlenn kuitañs pe ziskarg euz an arhant a fiziont e izili o breuriezh evid rei skoazell da gas da benn ar hefridiou o devez d'ober euz o 'ferz.

Daoust d'ar guchennad vad a rankas paea diwar he zusi evid ar c'hantvet-diner, e chomas kalz arhant gand c'hoar Per-Yann, deuet da veza pinvidig en eun taol-berr.

Pa oe renket ar hoñchou gand an noter, eur pennadig warlerh ar votadeg, e vouse'hoarze an aotrou Koadou, gand fent, o soñjal e oa bet talvezet susit ar hloareg braz, da genta d'e hoar eet ar voujedenn ganti ha, d'an eil, da zanvez-kannad ar re wenn eet ar maout gantañ, rag, ar wechad-se, e oa bet kannet ar re ruz.

Yeun ar Gow.

salm 22 : ar pastor mad

Doue zo va 'fastor.
Ne ziuver din netra!
Ha pa vez re a hor
Ez an da zisheolia.

Ar peuri a zo glaz
Ha druz en e brajou.
An dour a red yen sklas
En hañv er feunteuniou.

Eñ a vag va ene
Gand ar gwella bevañs.
Me a veul va Doue,
Ennañ em-eus fiziañs.

E-kreiz an noz zoken
N'em-eus aon rag netra:
Eñ zo e va hichenn
Gand e vaz en e zav.

Ha va maga a ra
Dirag va enebour,
Ne ziuver din netra:
E galon a zo aour.

Nag e vin eüruz
E-pad va oll buhez!
Doue madelezuz,
Va dalhit en ho lez!

Mab an Dig.



GERIOU - KROAZ

Diskoulm da gudenn an niv. 112

T	A	V	A	R	N	E	R
R			S	K	O	R	A
A	K	E	T		Z	E	N
B	E	L	E	G	I		N
A	L		N		E	T	A
S	O	N	N		R	A	
E	U	R	E	D		R	E
R			T		P	O	Z

A-led.

- I. Unan euz binviou ar mañsoner.
- II. A vez kavet awechou warlerh ar pri. — A verk ema pell ar pezh a ziskouez.
- III. A ra al lêz keid ha ma vezer o horo.
- IV. Ragano.
- V. An den-ze a vez aliez diêz beva gantañ.
- VI. Mein rond. — A verk eun urz.
- VII. A hell beza gwenn. — Ouspenn gand aour e heller henn ober.
- VIII. E Douarnenez. — Eienenn ar varzed.

A-bik.

1. Leun a zrein.
2. Euz ar verb rei. — N'eo ket houmañ eo.
3. E Breiz e kaver kalz anezo.
4. Evid mond en eur park. — E Landevenneg.
5. A vez greet d'ar poent diweza.
6. Er wezenn.
7. Penn tiegez. — Ouspenn.
8. Ar relijiuz henn gra. — Araogenn.

	1	2	3	4	5	6	7	8
I								
II								
III								
IV								
V								
VI								
VII								
VIII								



PHOTO « PROGRÈS »

Ar brosesion
e Bleun-Brug Sant-Tegonneg